


h. Derrien o' approuroffra m. l'vique



B U H E Z

S A N T E S G E N O V E F A ,

Voar un Ton neve.

ME ho suppli, Compagnunez,
Da glevet cana ar vuhez
Da Genovefa, ez è gret
Mellezour d'an Itrounezet.

A Brabant e voa guinidic,
A lignes nobl ha pinvidic,
Ha Christenien vat voant ive,
Guir servicherien da Zoue.

Pa voa ebars he bugaleach,
Hi a gare an Hermitaich,
En ur c'horn a Jardin he Zar,
Nemet eno n'en em gueve mat.

He Mam ous e c'honsideri,
Un deiz a c'houlennas outi:
Penaus, ma merc'hic Hermites,
Ha na zeuot-hu mui d'ar Palæs?

Va Vam, e cornic ho jardin
Me ameus ur bouquet divin,
M'emeus eno ur mellezour.
An Autrou Sant Ian-Vadezour.

Allas! ma merc'hic, emezi,
C'hui n'en doc'h quer evit souffri;
En desert ez eus cals a boan,
C'hui n'en doc'h quer evit souffran.

A

2

Caëroc'h evit Fourdelisen
 E voa ar verc'h-màn a dra certain,
 Quen na zeu da vit he fortret
 Da gaç d'an Noblanç da velet.
 Ur Palatin hanvet Siffroy
 A glevas ive petra oa,
 A zisquennas ebars e Brabant
 Gant un equipach excellant
 En Brabant pa oue disquennet,
 E ty he Zad en em renter,
 En em presantas ebars er Pelæs
 Da saludi ar Prinç hac ar Brinces.
 Goude o veza saludet,
 E vennat en deus goulennet,
 Diouz he Mam, diouz he Zat
 En deus goulennet e vennat,
 Ma velse ar Brinces yaouanc
 Quent evit monet a Vrabant.
 He Zat o tont da gonsideri
 E voa avantachus ar parti,
 A roas carg d'he Vam neuse
 Da ouzout hac y a zemesse
 Va merc'h, emezi, en em breparet,
 Arru so ur Prinç d'ho quelet,
 Ur Palatin a goad huel,
 Quinderv gompes d'an Impalaër.
 Ne oun petra raër dezâ,
 Me n'emeus nemet seitec bloa,
 Ne doûn c'hoas nemet ur buguel,

3

Da vont e suit un Impalaër.

Evel an Heul pe ar C'hristal
Ec'h antreas ebars er Sal;

Ar Palatin so estonet

O confideri he guenet.

Gant enor ha perseveranç

E eure dezàn ur reveranç;

He furnez hac he vodesti

A blich meurbet d'e faltasi.

Mæs pa oue parlanter dezi

Voar ar sujet a zimisi,

E chenchas a liou he bifaich;

Ar Palatin e remerquas.

Ne ouffe den confideri

Pegument a velancoli

A gonserve ar Palatin

Gant aon caout refus diouti.

Ur mis antier oa bet padet

Ar solennite eus an Euret,

Ar sonerien, ar bal, an danç,

Bisitrou bemdez gant Noblanç.

C'hui Siffroy, hoc'heus eureuget

Ar c'haëra dimeus ar merc'het,

Evit monet gueneoc'h d'ho ti,

Diouallet ne deffe annui.

Birviquen annui ne deffe

Entre ma vezin em buhe

Ne d'e quet da gaout annui

E c'houlennañ da vont d'am zi.

A ij

4

Siffroy o veza preparet
 Da vont da Treves gant e Bried,
 E oue gant e dut recevet
 Gant cals a joa hac a respet.

Daou bloas antier ez int bet
 Hep beza gant netra tourmantet;
 Bras oa sur ar fidelite
 A oa etre an daou Bried-se.

Quen na zeuas Abderame,
 Un adversour bras d'ar Roue,
 Da brometi a dra certen
 Massacri an oll Gristenien.

Biscoas distruch a Soudardet,
 Evit ur veich ne oa guelet;
 Adal Sodom bete Sabe,
 Bete Tour e pade e Arme.

Tri ugent mil a Soudardet,
 Ha daouzec-mil a Zragonet
 A voa gant Martel dirac Tour,
 Ha choas e c'houlenne sicour.

Discriva eure d'an Noblanç,
 En Allamaign, e Spaign, e Franç,
 Dont da alista Charles Martel
 A voa general er bresel.

Siffroy voa unan ar re vrasa,
 A varche ive da guenta,
 Hac e voe dezan disrivet
 Monet gant an Allemaignet.

Siffroy al liser-ze pa velas,

5

A roas e Genovefa,
 E dieguez hac e oll vadou,
 D'e gonfidant hanvet Golo.
 Neuse pa oa great e Arme,
 E partias en hano Doue,
 E voe gant Martel recevet
 Gant cals a joa hac a resper.

A drugarez an Tad Eternel
 E deut ar victor gant Martel;
 Abderame a so bet lafet
 En Tour hac e oll Soudardet
 Pa oa achu ar gombat-se,
 En deus bet Siffroy digacet
 E zigentil hanvet Lanffroy
 Da velet e Genovefa.

Chetu deoc'h, Itron, quelou,
 Liferou digant an Autrou,
 Er paquet ez eus ur presant
 A dal bepret pevar mil franc.

Lavaret a eure d'an Itron
 E zae an Autrou en Avignon;
 E Narbon eo bet quemeret
 Roue bras ar Sarrazinet.

Pa glevas an Itron quemense
 E zea e fried d'an Arme,
 E scrifas buan dre Lanffroy
 Da vont d'e gaout adarre.

C'hui a so, Siffroy, en Arme
 En danger bras eus ho puhe,

A iij

6

Mæs ho Genovefa a so
 En quer bras danger gant Golo.
 Pa ne vet n'emeus quet a c'hoant,
 Da lavaret traou insolant,
 Me lavare darn ar proposiou
 A gleve an Itron gant Golo.
 Golo a voa an Intendant,
 A voa bemdeis comunamant
 E compagnunez an Itron,
 En despèt d'e opinion.

Laqua evez, papillon bian,
 Rac na vez losquet gant an tan,
 An tan eus an impurete
 So en da galon nos ha de.

Ma songes en devotion
 Hac e modesti da Itron,
 Ne laquaffes quet da speret
 Da garet nep ne car quet.

Pa voar erfat ar mechant-màn,
 Ne zeui quet a ben ar Brinces-màn,
 E fonch ma vise lequet
 E soupçon dirac he Friet.

Amàn eo guelet an impi
 O commanç e dragedi;
 Embet c'hui velo, Christenien,
 E draïtourachou pen-da-ben.

Ur C'higuinour a voa en ty
 A bell a oa o servichi,
 Hennes a gare an Itron,

7

Palamour ma eo den guirion.

Rei a eure an Intendant
D'ar C'higuinour commandant
Da vont d'he c'hampr pa vize coufquet
Laquat eno e quemeret.

Caër en devoa an diou innoçant-se
Goulen an douar hac an Eê
Da zonet eno da destou
Eus draïtouregeou Golo.

Allas! emezi, ous ar gibet
Mervel, paour quez, a vezo ret :
Ni a raï pinigen hon daou
Eus an draïtouregeou Golo.

Quemeret voe ar C'higuiner,
Hac en laqueat prisionier,
Ha Genovefa a voa laquet
Ebars en ur gampr alc'hueset;
Ahane oute e combate
Abalamour d'ar chastete.

Scrifa ra Golo liferou,
O caç messager d'an Autrou,
Da lavaret voa decedet
Gant ar C'higuinour e Bried.

Discriva a eure an Autrou
Da laquat Drogan d'ar maro,
Ha da laquat Genovefa
Er prision quen na arriveje.

Pa voa bet pemp mis er prision,
E c'huillioudas an ltron,

A iv

8

Hep ficour, na goulou, na tan;
Hi a c'hanas ur map bihan.

Ur map bihan e deveus ganet,
A baccas en ur serviet;
Gant aon ne varvse diganti,
Hi a songeas e gristeni,
Hac en hanvas Benony.

Sevel a eure Golo ar brut
Comunamant emesq an dut
Da lavaret oa beuzet Siffroy
O retorn dious an Arme.

Neuse e caças e Vagueres
Da c'houlen digant ar Brinces,
Mar carse dont d'e eureugi,
E rage liberte dezi.

Ar Santes o veza quelennet
Gant ar Rouanes eus ar bet,
Ebars er gambr pa antreas,
Ur façat dezan a roas:
Hennes eo ar fidelite

As poe prometet da Siffroy?

Ma visez bet te fidel din,
Pa voas lequeat Mæstr en ty,
Te a vise recompancet,
Pa vise arruet va Friet.

Erruout a ra-liserou

Penaus e teue d'ar gueur an Autrou,
Pa gleo Golo eo arru ar C'hont,
E za da Drasbourg d'e rancontr.

9

Mont a ra da dy ur forceres,
 Hac a voa choar d'e vagueres,
 Ha roi dezi aour hac arc'hant,
 Quement quen na vife contant.
 Ha me, eme ar Vroec vaillant,
 M'emeus ur mellezour ardant,
 Hac a rai da Siffroy guelet
 Ar pez biscoas n'en deus c'hoarvezet.
 Neuse pa oa sur e affer,
 E zeas joaus ebars er Guer,
 Ma oa gant ar C'hont diguemeret
 Gant cals a joa hac a respet.
 Neuse en tennas a goste
 Da c'houlen ountá ar virione
 Var ar sujet eus e Bried
 A ra e galon contrisset.
 Lavaret a eureu Golo dezán
 N'en devoa micher da zoueti
 Dimeus an infidelite
 A so prejudic d'ho puhe.
 Ouspen, eme an den mechant,
 Me oar ma zeus ur Vroec vaillant
 Hac a rai deoch' guelet presant
 Quement so grêt en hoc'h absanç.
 Siffroy neuse ous e guelet,
 A so e speret contantet,
 Evel ma ve d'ar Gristenien
 Donet da gridi ar Sorcerien.
 Mont a refont o daou assambles

10

Evit caout ar forceres
 En toul dindan an douar,
 Eleac'h na ve nac Heaul na Loar.

Ar forceres a alumas
 Diou c'houlaoüen a goar glas,
 Carguet ur vazel dimeus a zour,
 Laquet ennàn ur mellezour,
 Ober dezàn teir gueich guelet
 Ar C'heguinour gant e Briet.

Neuse e roas ar fetanç da Golo
 Da vont d'e lacat d'ar maro,
 Hy hac he mabic Benony,
 Gra deze ar maro a guiri.

Golo pa oa fur eus e affer,
 A retournas joaus d'ar guer,
 Hac a lavaras d'e Vagueres:
 Gret eo ar veich-màn eus ar Brinces.

Roet eo e fetanç gant Siffroy
 Evit laza Genovefa,
 Hy hac he mabic Benony,
 Me a roi deze ar maro a guirin.

Ur pl-c'h yaouanc a oa en ty,
 Ur verc'h dezi o servichi,
 Touchet eus a gompaffion,
 A yeas da lavaret d'an Itron.

Alias! emezi, va Mæstres,
 Er veich-màn ez è grèt eus ho puez;
 Deut eo ar fetanç gant Golo
 Evit ho lacat d'ar maro.

II

Ma mignones, livirit,
 Penaos e zaï d'am Benony?
 Allas! ma Mæstres, emezi,
 Mervel a raï couls ha c'hui.

Ma mignones, mar em c'heret,
 Grit ur plijadur em requet
 Digacit din liou ha paper,
 Evit ma scrifin ul lizer,
 Evit ma scrifin ur billet
 Da lavaret adieu d'am Priet.

Pa vezo Golo o coanian,
 C'hui allo donet davitan,
 Hac e lacat em c'habinet,
 Ur c'houls bennac e vezo cavet.

Adieu, emezi, va Friet,
 Me ya d'ar maro en ho requet;
 Biscoas n'emeus grêt resistanç,
 Da souffri dre obeissanç.

Rei a eure an Intendant
 Da zaou vevel commandant
 D'o laza en ur plaç egaret,
 Digaç dezàn o zeaut da velet;
 Sevel a eure dirac an de,
 Ha caç ganta an daou den-se.

Pa voant erruet er prison,
 E voe divisquet an Itron,
 Hac e rogeont dezi var he zro
 Ur c'hos vantellic d'e golo.

Pa voant arru ebars er plaç,

12

Unan a denn e gontel noas
 Evir laza he Benony
 A voa etre he divetc'h ganti.
 Ne devoa lavaret guet eber,
 Neuse e commanças da brezec,
 E za d'an daoulin diraze
 D'ho suplia en hano Doue,
 E laza quent evir he buguel,
 Ne rencse quet diou veich mervel.
 Pa ze prometet he buez
 Dezi gant he daou servicher,
 Ec'h antreas neuse ebars er c'hoat,
 En ur o zrugarecaat.
 Pa oa o tremen ur rivyer,
 E quemeras goalen Siffroy,
 E quemeras e ziamant,
 Hac en taulas en dour coulant.
 En ur lavaret ne devoa quet
 E nep moyen poan o velet
 Coll evelse un diamant
 A voa caus dezi a gals tourmant.
 An diou nos quenta ez ê bet
 Dindan un Deroen o cousquer,
 Hep souffri na poan nac annui,
 Nemet damant d'he Benony.
 Un truez bras oa e c'hlevet,
 Pa en em fantas dilæset;
 Allas, emezi, va buguel,
 Ar veich-màn e renquit mervel.

13

Guerc'hes Vari, penaus a rin,
 Ma na deu mui a lās em peutrin?
 Ne den gantà nemer ar goat,
 Ne gueff pelloc'h banne lās mat.

O ma Doue oll-buissant,
 Sellit a druez ous va innoçant:
 Roit dezan ar Mann da zibri,
 Evel ma roet d'ar malvrini.

Neuse e tisquennas ar Verc'hes
 Er c'hoat da gaout ar Santes,
 A zigaças dezi un Heises,
 A vezo dezàn magueres.

Quemerit ho mabic christen,
 Deut da guichenic ar feunteun,
 Ha chetu amàn un Heises
 A vo d'ar buguel magueres.

Ar bleizi, al leonet mechant,
 A voe rentet obeissant;
 Bemde e teuent d'e saludi,
 Ha da renta bizit dezi.

Er c'hoat ez oa ur porc'hel goue
 A zeue d'e gue'et bemde,
 Da deuriat an douar dezi
 Da gaout queler da zibri.

Pa oa un daou vloas tremener,
 Un Æl guen so deut d'e guelet,
 Ha digaç dezi ur Groas arc'hant,
 Hac ur Crucifi olifant.

Ma merc'h, eme an Æl, couraget,

14

Ur veich e viot delivret ;
 Preparet so ur Gurunen
 A yelo un deiz var ho penn.
 Pa voa ar pemp bloas tremenet,
 Da voela eo en em lequet
 Var he daoulin dirac ar Groas,
 Evellen outi e comfas.
 Penaus, emezi, ma Doue,
 Hac er guis-màn e chomin-me?
 Ha ne quet aoualc'h pemp bloa
 Da veza bet er poaniou-mâ?
 P'am bize rannet hoc'h Ilifou,
 Ha ranverset hoc'h Anteriu,
 E vife ho coler apeset
 Gant an daelou ameus squillet.
 Petra, ma Doue, ameus-me gret
 Da veza quer cre abandonet?
 Deja ameus ancounec'het
 An usach am boa da brezec;
 Mæs mui a gresq ma foan
 Eo ma buguel a so bihan
 Ar Grucifi dimeus ar Groas
 A gomas outi dre viracl bras:
 Me, ma merc'h, petra ameus gret
 Da veza ous ur Groas staguet?
 C'hui lavar ho map a gresq ho poan,
 Ma hini ne de quet bihan,
 Guelet va Mam, Yan ha Madalen
 Rannet o c'halon em c'hichen,

15

Chetu ar Santes confolet
 Gant ar voues a Salver ar bet,
 Ne c'houlén mui nemet poaniou
 Hac ar c'hruela tourmanchou.

Pa oa un devez an Autrou
 O fellet ouz e baperiou,
 Ec'h erruas gant ar billet
 En devoa crifet e Briet.

Ne ouffe den confideri
 Peguement a velancoli
 A gonceve calon Siffroy
 Pa lenne an tam paper-mâ.

Siffroy n'en deus mui a repos,
 Ne ell cousquet na de na nos
 Gant un dra o laret dezà,
 Te so un den ar c'hruela,
 En deus lazet da Vap ena,
 Drogan ha Genovefa.

En em lequeat oa expres
 Da vont d'ar chasse un derves,
 Ha ma rancontras un Heises
 E rentas e coat ar C'hontes;
 Er c'havern oa en em dennet
 Adren quein ar Santes cuset.

Siffroy a oue bras estonet
 O velet form ur femelen,
 Hac un Heises en e c'hichen;
 Ma teu un dra da laret dezàn
 Da Genovefa eo houmàn.

Perac oc'h ase er guis-se,
 Er form-se emesq al loenet goue?
 Me so ur Vrœc paour a Brabant,
 Rac aon a goler va Friet
 Seiz bloas so aman retiret.

Grœc a Vrabant, din leveret
 Pe hano ac'hanoc'h a reat?
 Genovefa e voan hanver,
 Ur Palatin voa ma Friet.

Cris vise ar c'halon na vouelse,
 En tal ar c'havarn nep a vise,
 O velet ar Prinç hac ar Brinces,
 Hac int semplet o daou assambles.

Pa di'emplas, e c'houlennas diouti
 Peleac'h ema ar Chrouadur
 En deus un Tad quen dinatur?
 Beo è, a drugare Doue.

Chetu e Vagueres ase
 Pa zistroas, e voa en e guichen,
 Hac un dornat quelet gantâ
 Da rei d'e Vam da leina.

Neufe e commandas d'e vevellou
 Monet d'ar guer da vit habigeou,
 Hac ar c'haros equipet mat,
 Da guerc'hat ar Santes hac e Map.

N'en de nemet ur bloaves
 Assambles gant ar Santes;
 Troet divarnomp teir goalen,
 Bresel, Quernez hac ar vocen. *FIN.*